

## Testenn evit ar Redadeg 2024 skrivet gant ar familh An Dreo

**Riwal** : Bemdez ez an e brezhoneg er gêr ha gant an dud tro-dro din.

**Tangi** : Labouret hon-eus holl, hag e reomp c'hoazh, e brezhoneg, e bedoù micherel disheñvel. Ar brezhoneg a zo bremañ evidomp eur yezh pemdeziek.

En em gavet eo ar vazh-test betek amañ hirio. Kaset ganeomp holl ! Met ouzhpenn ur vazh-test hon eus treuzkaset e kerzh ar Redadeg! Emskiant pe get, treuzkaset hon eus ivez plijadur, joa ha lorc'h. Gourc'hemennoù deomp holl evit an dra-se!

**Rozenn** : A-hed ar sizhun-mañ eo bet lakaet hor yezh en-dro en he flas : ur benveg a vuhez ! Ha vad a ra ! Ar yezh eo a dreuzkasomp da gentañ, o vevañ asambles an darvoud brav-mañ. Met ouzhpenn ar yezh a dreuzkasomp. Soubet omp holl, en hor sevenadur : dre an anvioù-tud, an anvioù-lec'h, an troioù-lavar, hor sonerezh, hon doare da geginañ, da zebriñ, da labourat, dre hon doare da ganañ, da zañsal, da riboulat ha da c'hoari. Treuzkas a reomp piv omp ni. Eus an denelezh eo a zo kaoz gand an treuzkas.

**Charlez** : Eus an denelezh hag eus ar sevenadur ivez ; ar sevenadur hag a gas un engroez da vezañ pobl : dre ar gomz, al lennegezh, ar barzhoniezh, ar c'han, an dañs, ar fent, ar faltazi hag all. Kement-mañ a ra diouzhomp ar pezh ez omp holl. Treuzkaset eo bet deomp ha kendalc'het e vo d'ar rummadoù yaouank.

**Tangi** : Ma 'z eo hor yezh ur pal da dizhout, un danvez dibriz, un alc'hwez aour e-giz ma lâre Anjela Duval, ez eo ivez ur benveg pemdeziek a ra diouzhomp ar pezh ez omp : e donder hor c'halonoù, tud emren hag anaoudek, disuj pa'z eo dav, gwriziennet en hor bro, hor glad hag hor sevenadur.

**Gwenn** : Ouzhpenn kant vloaz'zo bremañ eo chomet a-sav un treuzkas a-bouez bras e Breizh : hini ar yezh. Ha d'e heul eo chomet a-sav ivez treuzkas un doare da welet ar bed, un doare da lavaret ar bed. Ma vije bet kendalc'het da dreuzkas ar galleg evel ar yezh nemeti hag a-us d'an holl yezhoù all, penaos e vije ar bed hiziv ? Deuet eo ar brezhoneg en-dro war-wel, pe kentoc'h war-gelev, abalamour m'ez eus tud hag o deus, d'ur mare bennak, divizet en em soñjal diwar-benn ar pezh a felle dezho treuzkas. Ha ne oa ket anat chom hep treuzkas mennozhioù bet resevet gant o zud ha cheñch penn d'ar vazh.

**Rozenn** : A-bouez eo kenderc'hel da dreuzkas ar yezh ha liesseurted hor sevenadur dre hentoù bras hag hentoù-treuz ivez.

**Charlez** : Greomp holl e seurt ma vo niverusoc'h-niverusañ ar Vreizhiz oc'h en em soñjal seder ha frank diwar-benn ar pezh o deus c'hoant treuskas.

“Kozh-Noe oa ar vran, pe kentoc’h ar vranez  
A glude en derwenn, er prad, traoñ ar menez.  
Espernet ma oa bet homañ eus ar freuzañ  
‘Foñs ar stank, ‘bord ar stêr, ken didalvout a dra.  
Labousezig ‘oa c’hoazh, hi o teskiñ nijal  
Ha stummañ he skouarn hag he mouezh da goagal ;  
Ha kement hag ober, ouzh trouzioù all ar Vro ;  
Trouz souezhus, he deus soñj, kan kentoc’h, skiltr ha brav  
M’he deus soñj mat outañ, n’e deus ec’h adklevet  
Nemet ar mintin-mañ ha gantañ dihunet  
Ar memes trouz ô, souezh ! ô ya, ar memes ton  
Hanter-kant vloaz goude, ar memes mouezh, eston !  
«N’eo ket, pa sonjan mat. Kalz re hir an amzer  
Eus ur rummad all eo. Med kanañ ‘ra ken kaer.  
War hir dermen o deus, a vamm da verc’h, desket,  
O finvidigezh dezho, ‘deus ‘veldomp treuzkaset”